

OFIS PUBLIK
AR BREZHONEG



OFFICE PUBLIC
**DE LA LANGUE
BRETONNE**

ENKLASK WAR LISEIDI GOZH DIWAN - 2012 -

OFIS PUBLIK AR BREZHONEG

ARSELLVA IMPLIJ AR YEZHOU

2013

Hentenn labour

E 2012 e oa bet graet un enklask gant Arsellva implij ar yezhoù diwar-benn red buhez skolidi gozh lise Diwan Karaez goude o bachelouriezh. E kenlabour gant Diwan Breizh ha renerezh al lise e oa bet kaset an enklask da benn. Gouzout petra a zeu liseidi Diwan da vezañ goude o bachelouriezh a oa pal an enklask, peseurt doare studioù a reont ha war peseurt micherioù ez eont. Dastumet ez eus bet roadennoù war o lec'hioù bevañ a-hed an amzer ivez.

Savet e oa bet **ur c'houlennaoueg** divyezhek enni 4 c'hraf pennañ evit dastum :

- **Titouroù dre-vras** evit anavezout gwelloc'h al liseidi gozh hag o familh (kumun orin),
- **O stummadur** evit gouzout peseurt studioù o deus graet,
- **O micher** evit gouzout hag en em gavet eo al liseidi war marc'had al labour dija, ha neuze war beseurt tachennoù,
- **E peseurt kumun(ioù)** eo bet al liseidi o chom abaoe o bachelouriezh.

Studiet eo bet **al liseidi gozh tapet o bachelouriezh ganto etre 2005 ha 2011**. Mont a raent d'ober un diaz a **411 den**¹. Kaset eo bet an enklask dre bostel, dre ar rouedadoù sokial ha dre lizher. Meur a wech eo bet adlañset an dud e-kerzh 2012 evit kaout ar muiañ a respontoù posupl.

216 respont zo bet gallet dastum a-benn ar fin, da lavaret eo **ur feur respont a 53%**. Ouzhpenn ar re-mañ, ez eus en em gavet 41 respont gant liseidi goshoc'h (bet o bachelouriezh a-raok 2005). Kuit da gammañ disoc'hoù an enklask ez eus bet divizet chom hep implijout ar respontoù “e-maez standilhon” en dielfennadenn nemet e degouezhioù resis zo. Gant un tamm muioc'h eget 200 respont evel diazez e talvez ar studiadennoù da-heul da ginnig tuadurioù da gentañ-penn.

Respontet eo bet gant ar re yaouank o-unan peurliesañ. Koulskoude, a-wechoù eo ar gerent o deus respontet. An tu brezhonek eo zo bet leuniet evit 89% eus ar respontoù. Gant ar gerent eo ez eus deuet respontoù e galleg kentoc'h ma n'eo ket ganto hepken.

Niverusoc'h eo bet ar merc'hed o respont (62%). E-keñver o bachelouriezh ez eus bet respontet muioc'h gant al liseidi S (43% eus bachelourien Diwan etre 2005 ha 2011 met 48% eus ar standilhon) ha nebeutoc'h gant al liseidi L² (28% eus bachelourien Diwan met 22% eus ar standilhon).


¹ 98% anezho a oa etre 19 ha 25 bloaz e 2012.

² S evit « skiantel », L evit « lennegel » ; n'eo ket heverk an diforc'h evit ar re ES (« armerzhel ha skiantel »).

Studioù

N'eus nemet ar vachelouriezh hollek a c'haller prientiñ e Diwan betek bremañ.

Peseurt bachelouriezh hollek a zibab al liseidi ?³



Tennañ a ra dasparzh liseidi Diwan (standilhon) etre an doareoù bachelouriezh hollek da hini ar boblañs dave nemet int un tamm niverusoc'h o tibab ar vachelouriezh lennegel (6 poent ouzhpenn). Mat eo notenniñ eo brasoc'h c'hoazh pouez ar vachelouriezh lennegel e-barzh hollad liseidi Diwan o deus bet o bachelouriezh etre 2005 ha 2011, pe o defe respontet d'an enklask pe n'o defe ket (12 poent ouzhpenn).


Holl liseidi gozh Diwan a ra studioù uhel, koulz lavaret, evel ma c'hoarvez dre-vras gant an dud yaouank ganto ur vachelouriezh hollek⁴. Diwar an 216 respont hon eus bet, n'eus nemet 2 zen n'o deus heuliet tamm stummadur ebet goude o bachelouriezh ha 4 o deus kroget gant un TGM⁵. Studioù hir a reont peurliesañ : an dud er standilhon hag a oa oberiant e 2012 zo bet oc'h ober studioù e-pad muioc'h eget 4 bloaz, well-wazh. Evel e peurrest ar boblañs, **tremen an hanter eus liseidi Diwan a ya d'ar skol-veur** goude ar vachelouriezh.

³ S evit « skiantel », L evit « lennegel », ES evit « armerzhel ha sokial ».

⁴ Hervez Ministrerezh an Deskadurezh Stad, 98,7% eus bachelourien hollek 2011 o doa lakaet o anv en ur stummadur uhel e 2011/2012 (Repères et références statistiques - édition 2012, Direction de l'évaluation, de la prospective et de la performance (DEPP), Ministrerezh an Deskadurezh Stad).

⁵ Testeni Gouested Vicherel (CAP e galleg).

Peseurt doare diskiblezh er skol-veur⁶ ?



Un hentad lennegel eo a vez dibabet gant an hanter eus liseidi Diwan er skol-veur e-skoaz 1/3 eus hollad studieren Frañs. Tachenn ar gwir hag an armerzh ne zedenn ket anezho kement hag ar boblañs dave avat.

	Diskiblezh	Studieren Frañs e 2011	Liseidi gozh Diwan
Gwir, armerzh	Gwir, skiantoù politikel	15%	4%
	Skiantoù armerzhel, merañ (estreget MES)	11%	7%
	Melestradurezh ekonomikel ha sokial (MES)	3%	2%
Lizhiri, yezhoù, skiantoù an den	Lizhiri, skiantoù al lavar	7%	13%
	Yezhoù	8%	22%
	Skiantoù an den hag ar gevredigezh	17%	16%
Skiantoù	Skiantoù diazez ha pleustroù	12%	10%
	Skiantoù an natur hag ar vuhez	6%	11%
	Skiantoù ha teknikoù an obererezhioù fizikel ha sportel (STOFS)	3%	4%
	Lies-skiantoù	2%	0%
Yec'hed	Yec'hed	16%	11%

⁶ Ar vachelourien dezho ur vachelouriezh hollek eo a zo bet miret evel poblañs dave studieren Frañs er grafik-mañ.

Kadarnaet eo ez eo dedennet liseidi gozh Diwan gant an diskiblezhioù lennegel dreist-holl (lizhiri, yezhoù, skiantoù an den). Kreñvaet eo o fouez pa'z eont d'ar skol-veur : 17 poent diforc'h zo e-keñver ar boblañs dave (da geñveriañ gant 6 poent lañs ar vachelouriezh L e-touez bachelourien Diwan ar standilhon).

Kalz aliesoc'h ez eont d'ober studioù war ar yezhoù eget ar re all : sellet a ra ouzh 22% eus studierien skol-veur Diwan e-skoaz 8% er boblañs dave. Un hanter eus ar re-se a embann ar brezhoneg evel diskiblezh yezhel nemetañ (ha pa rafent war-lerc'h studioù ne dennont ket d'ar yezhoù), an hanter all a studi yezhoù all (gant pe hep ar brezhoneg). En holl, an 2/3 eus al liseidi gozh hag a ya da studiañ ar yezhoù er skol-veur a zibab ar brezhoneg evel danvez pennañ pe eil danvez.

Daoust d'ar vachelouriezh ES (armerzhel ha sokial) bezañ dibabet tost ken alies gant liseidi Diwan ha gant ar yaouankiz all (30% e-skoaz 33%), diskiblezhioù ar gwir hag an armerzh a vez dibabet nebeutoc'h gant studierien ar standilhon eget gant studierien Frañs dre-vras. Un diforc'h brazik a stader war dachenn ar gwir hag ar skiantoù politikel dreist-holl (4% eus studierien skol-veur ar standilhon e-skoaz 15% er boblañs dave).

Un tamm re vihan eo ar standilhon studi evit ma vefe tennet titouroù resis evit a sell ouzh an danvezioù all. Tuet e vefe ar re a ya war studioù skiantel da zibab skiantoù an natur hag ar vuhez aliesoc'h memes tra (10% eus studierien skol-veur Diwan e-skoaz 5% er boblañs dave). Eus tu ar studioù skol-veur war ar yec'hed e hañval ar vezegiezh bezañ dibabet aliesoc'h gant liseidi gozh Diwan eget gant an dud yaouank all a zibab an hent-se (13 den diwar 15 e-skoaz 60% eus ar studierien war ar yec'hed e skolioù-meur Frañs).

Evel ar peurrest eus ar yaouankiz, un darn vat eus liseidi gozh Diwan a ra **studioù uhel er-maez eus ar skolioù-meur** a-hend-all. Ken liesseurt eo an hentoù a c'hallont dibab (TGM⁷, KTU⁸, ESAD⁹, KESU¹⁰ pe stummadurioù all) evit ur standilhon a chom bihan m'eo diaes tennañ kentelioù war an tem-se. 2 dra heverk a zeu war wel memes tra :

- Stankoc'h ez a liseidi gozh Diwan e-barzh skolioù arz eget ar studierien all (skolioù tisavouriezh, arzoù-kaer pe graferezh) : 5% eus ar standilhon e-skoaz 2% eus bachelourien Frañs e 2011.
- Hañvalout a reont bezañ dedennet muioc'h eget peurrest ar boblañs gant an diskiblezhioù lezvezegel (stummadurioù klañvdiour evit an hanter anezho, met ivez etiopatiezh, osteopatiezh, ergoterapiezh, h.a.) : 7% e-skoaz 1% er boblañs dave.

⁷ Testeni Gouested Vicherel (CAP e galleg).

⁸ Kevrenn Teknikourien Uhel (Section de Techniciens Supérieurs e galleg).

⁹ Ensavadur Skol-veur a Deknologiezh (IUT e galleg).


¹⁰ Klas Embrientiñ ouzh ar Skolioù Uhel (CPGE e galleg).

En em gavout war marc'had al labour

61 den hepken er standilhon zo en em gavet war marc'had al labour, ar re all n'o deus ket echuet o studioù c'hoazh. En degouezh-mañ hon eus kavet talvoudus kemer e kont ar respontoù hor boa bet er-maez eus ar standilhon (gant tud koshoc'h, oberianted anezho aliesoc'h), ar pezh a ra eo diazezet ar pennad-mañ war 99 respont. Re nebeut ez eo evit sevel stadegoù resis, met a-walc'h eo evit lakaat tuadurioù war wel.

Tro-dro da 23 bloaz e tegouezh liseidi gozh Diwan war marc'had al labour, well-wazh. Dilabour eo nebeutoc'h eget 10% eus an dud yaouank oberiant tremenet dre lise Karaez, evel ma c'hoarvez e-touez an dud yaouank oberiant o deus heuliet ur stummadur uhel (roadennoù Ebssa, 2010).

Dasparzh ar boblañs oberiant o labourat dre rummad sokiomicherel¹¹



Seul uheloc'h al live studi er boblañs dre-vras (a reer "poblañs dave" anezhi), seul vrasoc'h eo lodenn ar rummadoù sokiomicherel uhel (micherioù intelektual, micherioù etre). Dasparzh liseidi gozh Diwan a denn da hini ar boblañs dave tremenet dre an deskadurezh uhel, nemet e seblant un tamm brasoc'h lodenn ar rummadoù sokiomicherel uhel hag un tamm bihanoc'h lodenn ar re izel (implijidi, micherourien). Ar fed ne vefe prientet nemet ar vachelouriezh hollek e Diwan a c'hall displegañ an disoc'h-se evit darn.

Un tamm brasoc'h eo ivez pouez ar rummad "Labourerien-douar, artizaned, kenwerzherien ha pennoù embregerezh" e-touez liseidi gozh Diwan. Eno e kaver

¹¹ Tud yaouank oberiant o labourat eo a ya d'ober ar boblañs dave amañ, da lavaret eo tud etre 15 ha 34 bloaz zo en em gavet war marc'had al labour ha n'int ket dilabour (diwar roadennoù niveradeg ar boblañs e 2006, Ebssa). Ar boblañs dave "deskadurezh uhel" a dalvez evit an dud yaouank o deus bet un diplom eus ar seurt-se. Evit al liseidi Diwan, en degouezh-mañ eo bet implijet ar respontoù hor boa resevet gant liseidi goshoc'h ouzhpenn ar standilhon orin : an darn vrasañ anezho zo erruet war marc'had al labour, ar pezh a ro an tu da gaout ur strollad a 91 den yaouank oberiant o labourat.

dreist-holl artizaned (kilvizien) ha tud e penn embregerezhioù bihan (kuzuliañ, stal, leti-preti), nebeut a labourerien-douar.

Rummad ar “Sternerien, micherioù intelektual uhel” er standilhon zo ennañ da gentañ sternerien embregerezhioù (ijinourien, karget a gefridi, da skouer), micherioù frank (mezeien pe micherioù lezvezegel dreist-holl, met ivez un alvokad, ur c’hontour-prizachour) ha micherioù ar c’helaouiñ, an arzoù hag an arvestoù (kazetennerien, aktored, ul levraoueger).

Micherioù ar c’helenn a vag rummad ar “Micherioù etre” dreist-holl, kelennerien divyezhek kentoc’h, hep mar ebet, a gelenn er 1^{añ} derez alies-mat. Micherioù ar yec’hed eo eil lodenn bennañ ar rummad-se, klañvdiourien evit ar braz anezho. Liesseurtoc’h eo ar micherioù all, met dont a ra war wel en o zouez ar buheziñ sokiosevenadurel (buhezourien) hag ar sevenadur (teuliourien).

Re liesseurt eo rummad an “Implijidi” evit tennañ is-rummadoù diwarnañ.

Dreist d’ar rummadoù sokiomicherel ez eo talvoudus kemer ur sell a-dreuz diouzh gennad obererezh pep micher. E-touez an tachennoù ma adkaver liseidi gozh Diwan pa zegouezhont war marc’had al labour e verzer da gentañ tachenn an deskadurezh, enni 22 zen, 19 kelenner en o zouez. Kement-se n’eo ket souezhus pa soñjer e vez dibabet diskiblezhioù lennegel gant an hanter eus al liseidi gozh a ya d’ar skol-veur.

Tachenn ar yec’hed a zeu da eil gant 14 den, klañvdiourien anezho dreist-holl en o zouez (9 den). Ne gaver ket amañ mezeien niverus daoust d’ar pezh a oa bet merzet e-touez ar studierien. Reizh eo e-keñver stern an enklask e gwirionez : ken hir eo ar studioù-se¹² ma n’eus ket kalz eus liseidi Diwan o deus bet amzer da gregiñ gant ar vicher.

9 den zo aet war dachenn an arzoù hag an arvestoù a-hend-all (sonerezh ha graferezh, da skouer), ha 9 den all war dachenn ar sevenadur (levraouegerien, teuliourien, buhezourien).


Micherioù liesseurt all a gaver c’hoazh er standilhon met n’int ket evit bezañ renket e hini ebet eus an tachennoù alc’hwez meneget a-us.

¹² 6 vloaz evit dont da vezañ diabarzhiad, etre 9 hag 11 vloaz evit echuiñ e studioù penn-da-benn.

Dasparzh familhoù al liseidi gozh

Eus **184 ziegezh** e teu 216 lisead ar standilhon. E **110 kumun** disheñvel edo an tiegezhioù-se o chom.

Lec'h bevañ familhoù al liseidi gozh d'ar mare ma oant el lise¹³



Aodoù kornôg Breizh ha kêrioù brasañ ar reter eo a zeu war wel er gartenn-mañ d'ar sell kentañ.

An dasparzh-se a glot gant rouedad ar skolioù Diwan er 1^{añ} derez dre-vras. Koulskoude, trowardroioù Douarnenez, su ar Vro-Vigoudenn ha korn-bro Lanniliz-Plougerne zo anezho 3 zachenn n'int ket diouzh ar reolenn-se : chañsoù bras zo e vefe kavet enno muioc'h a skolidi o doa kroget o amzer-skol en un hentad all, pe c'hoazh familhoù o deus dilojet e-kerzh ar bloavezhioù.

Gant ar gartenn e verzer ivez e teu alies ar familhoù eus trowardroioù ur skolaj Diwan (Plijidi, Kemper, ar Releg-Kerhuon, Treglonoù-Gwiseni) pe lise Diwan Karaez.

Da-heul, pell dirak an departamantoù all emañ departamant **Penn-ar-Bed** (ennañ 3 skolaj ha **61% eus ar familhoù**), heuliet gant Aodoù-an-Arvor hag ar Mor-Bihan (1 skolaj zo e pep hini eus an departamantoù-se ; bodañ a reont 32% eus ar familhoù), bihan a-walc'h eo pouez an 2 zepartamant all ma ne oa skolaj Diwan ebet betek nevez zo¹⁴ : 5% eus ar familhoù el Liger-Atlantel, 2% en Il-ha-Gwilen.


¹³ Pa oa dispartiet ar gerent ez eo lec'h annez ar c'har meneget da gentañ a zo bet implijet er gartenn-mañ.

¹⁴ Ur skolaj Diwan zo e Sant-Ervlan (44) abaoe 2008, n'eus lisead ebet er standilhon a c'hall bezañ bet skoliataet ennañ.

Lec'h bevañ al liseidi gozh e 2012

E 77 kumun disheñvel edo 216 lisead ar standilhon o chom e 2012 : 40 kumun e Breizh (159 lisead), 21 e Bro-C'hall (34 lisead) ha 16 er-maez eus Frañs (23 lisead). Broioù gallek a zibab al liseidi a ya d'an estrenvro alies (10 diwar 24 lisead).

Lec'h bevañ al liseidi gozh e 2012



*Pa geñverier ar gartenn-mañ gant hini ar familhoù e weler emañ **tolpet ouzhpenn an hanter eus al liseidi e 3 c'hêr vrasañ Breizh e 2012 : Brest ha Roazhon da gentañ, a-rampo, heuliet gant Naoned, un tamm mat war-lerc'h. Er-maez eus Breizh emañ ouzhpenn 1/4 eus al liseidi gozh o chom.***


E 3 c'humun emañ ar pep brasañ eus al liseidi gozh o chom e 2012 ; bep bloaz e teu brezhonegerien yaouank niverus da Vrest, Roazhon ha Naoned evit o **studioù** pe o **labour**.

Pouez ar poloù stummadur uhel hag ar poloù implij a c'hoari kalz aze. Hervez ur studiadenn bet embannet gant an Ebssa e 2010¹⁵, an 3/4 eus re yaouank Frañs etre 18 ha 24 bloaz a gaver e 30 tolead kêr hepken. Ar memes tra a stader gant liseidi Diwan : en unan eus an 3 c'hêr meneget a-us emañ **72%** eus ar re zo e Breizh e 2012.

Studierien eo 153 eus al liseidi kozh o deus respontet (71%), ar re all zo war marc'had al labour (29% er boblañs oberiant).

¹⁵ Brutel Ch., 2010. Jeunes et territoires – L'attractivité des villes étudiantes et des pôles d'activité. Insee Première, Paris. 1275, 4 p.

Lec'h bevañ al liseidi gozh a oa studierien e 2012



61% eus hollad ar studierien a zo o chom e 3 c'hêr skolioù-meur pennañ Breizh : Roazhon (45 den ha 29,5% eus an hollad), Brest (38 den, 25%) ha Naoned (10 den, 6,5%). 1/4 eus hollad ar studierien zo aet kuit eus Breizh evit o studioù (39 den, 25%).

Roazhon, Brest ha Naoned eo 3 c'humun Breizh enno ar muiañ a studierien, met disheñvelderioù zo etre dasparzh ar re yaouank dre-vras hag hini ar re zo tremenet dre al lise Diwan :

Dasparzh ar studierien en 3 c'hêr skolioù-meur pennañ Breizh

Tolead kêr	Studierien etre 18 ha 24 bl. (Ebssa, niveradeg 2006)	Studierien "Diwan" etre 18 ha 24 bl. (OPAB, enklask 2012)
Roazhon	44%	45%
Brest	16%	42%
Naoned	40%	12%

E-touez liseidi Diwan, ha pa vefent dedennet da gentañ gant Roazhon, ez eo brasoc'h pouez Brest eget e poblañs ar studierien dre-vras (42% e-skoaz 16%) ha bihanoc'h hini Naoned (12% e-skoaz 40%). An anadenn-se zo liammet ouzh pouez dreist Penn-ar-Bed e rouedad Diwan (61% eus ar familhoù a oa o chom en departamant-mañ). Koulskoude, daoust ma tesach madik Brest studierien Diwan, kalz anezho a zibab mont da Roazhon, hag ar gêr-mañ da c'hounit evel-se kalz a vrezhonegerien.

Ar c'hêrioù skol-veur a zesach kalz eus o studierien en dachenn zo nes dezho. E-se, o c'houzout ez eo a orin eus Penn-ar-Bed al lodenn vrasañ eus al liseidi Diwan, e verzer pegen bras eo, a-benn ar fin, nerzh desachañ **Roazhon ha Naoned** warno (enno ur c'hinnig studioù ledanoc'h eget e Brest) : d'an 2 dolead kêr-se ez a **57% eus liseidi Diwan tra ma n'eus nemet 7,6% eus ar familhoù a oa o chom en Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel.**

En ur studiadenn bet embannet gant Ebssa Breizh e 2010¹⁶ diwar-benn red buhez yaouankiz rannvro Breizh e kaver roadennoù diwar-benn lec'h bevañ ar studierien a orin eus Penn-ar-Bed :

Da belec'h ez a ar studierien a orin eus Penn-ar-Bed evit o studioù

Lec'h studi	Poblañs dave ar studierien (Ebssa, niveradeg 2006)	Studierien tremenet dre lise Diwan (OPAB, enklask 2012)
Penn-ar-Bed	63,5%	41%
Il-ha-Gwilen	9,5%	25%
Er-maez eus rannvro Breizh	18,2%	30%

Lennadenn : e-touez ar studierien a orin eus Penn-ar-Bed¹⁷, 1/4 eus ar re tremenet dre lise Diwan a ya da Roazhon d'ober studioù e-skoaz nebeutoc'h eget 10% er boblañs dave.

Liseidi gozh Diwan a orin eus Penn-ar-Bed zo tuet da guitaat muioc'h o departamant ha rannvro Breizh eget studierien ar boblañs dave. Ha pa vefe bras an niver a liseidi a ya da Vrest evit o studioù, **nerzh desachañ Roazhon war liseidi Diwan zo kreñvoc'h eget war ar boblañs dave.**

1/4 eus ar studierien tremenet dre Ziwan a veve er-maez eus Breizh e 2012 (1/3 ma seller ouzh rannvro Breizh hepken), ar pezh a zo uheloc'h eget er boblañs dave.

E-touez ar studierien a veve e rannvro Breizh 5 bloaz a-raok, 21% o doa kuitaet ar rannvro evit o studioù e 2006 hervez Studiadenn Ebssa Breizh war red buhez ar yaouankiz. O kemer an hevelep diazez e verzer **ez eo tuet muioc'h c'hoazh liseidi gozh Diwan da guitaat Breizh eget ar re all** : da vak+5, emañ 41% anezho a chom er-maez eus rannvro Breizh.


Dre-vras, n'eus ket muioc'h eget 4% eus ar studierien c'hall a ra o studioù en estrenvro bep bloaz¹⁸. E-touez liseidi gozh Diwan, sevel a rae da 12% feur ar re a oa en estrenvro e 2012 : **tuet muioc'h eo ar studierien tremenet dre Ziwan da vont d'an estrenvro eget ar re all enta.**

¹⁶ M. Ramonet, 2010. De l'adolescence à la vie adulte : le cheminement des jeunes bretons de 15 à 29 ans. Octant Analyse, Roazhon. 1, 5 p.

¹⁷ Da lavaret eo, studierien hag int o chom e Penn-ar-Bed 5 bloaz a-raok evit standilhon an Ebssa, studierien hag e oa o familh o chom e Penn-ar-Bed pa oant el lise Diwan evit standilhon hon enklask.

¹⁸ 74 714 studier e 2009, da skouer (hervez Campus France, Les étudiants internationaux – Chiffres clés CampusFrance 2011, 28p.), e-keñver 2,3 milion a studier e Frañs d'ar mare-se.

Lec'h bevañ al liseidi gozh a oa war marc'had al labour e 2012



1/3 eus hollad ar re oberiant a zo o chom e 3 c'hêr bennañ Breizh (21 den diwar 62) ha tost 1/3 all a vev er-maez eus Breizh (18 den).

A-feur ma echu al liseidi o studioù ha m'en em gavont war marc'had al labour, e stader un doare didolpadur war an dachenn. Bras e chom pouez an 3 c'hêr skolioù-meur pennañ (Brest, Roazhon ha Naoned) met digresket eo e-keñver ar pezh e oa e-touez ar studierien¹⁹. **Pa grogont gant o buhez oberiant, ul lodenn eus liseidi gozh Diwan en em stailh e kumunioù all estreget Roazhon, Brest ha Naoned**, e Breizh-Izel alies evit ar re a chom e Breizh. Pell-pell emeur c'hoazh diouzh dasparzh o familhoù avat²⁰.

Hervez studiaden 2010 an Ebssa war ar c'hêrioù skol-veur²¹, e 30 anezho e kaver an hanter eus re yaouank etre 25 ha 29 bloaz, tud oberiant evit ar braz anezho. Ar memes tuadur a stader gant liseidi gozh Diwan deuet da vezañ oberiant : en 3 c'humun meneget a-us emañ tost an hanter eus ar re zo e Breizh e 2012. **Evel ar re yaouank all eo tuet liseidi Diwan da chom er c'hêrioù bras** p'en em gavont war marc'had al labour. Diforc'hioù heverk zo e-keñver dasparzh familhoù al liseidi : ar re-se a vev er c'hêrioù bras pe etre muioc'h eget o zud, dilezet o deus an aodoù (stank a familhoù a oa en arvor norzh Penn-ar-Bed hag etre Penmarc'h hag an Oriant) ha kornioù-bro zo (evel Bro-Dreger, da skouer). Levezonet kalz e tle


¹⁹ An 3 c'hêr-se a vade 82% eus studierien « Diwan » o chom e Breizh e 2012 e-skoaz a-boan an hanter eus al labourerien yaouank.

²⁰ Nebeutoc'h eget 10% eus ar familhoù a oa o chom en 3 c'hêr pennañ e-skoaz 1/3 eus tud yaouank oberiant ar standilhon.

²¹ Brutel Ch., 2010. Jeunes et territoires – L'attractivité des villes étudiantes et des pôles d'activité. Insee Première, Paris. 1275, 4 p.

bezañ o dibaboù gant ar poloù implij eus un tu (trowardroioù ar c'hêrioù bras pe etre) ha priz al lojeiz eus un tu all (kêroc'h en arvor).

Pouez pep departamant e dasparzh al liseidi gozh hag o familhoù



Merzout a reer tuadurioù a denn d'al lec'hioù a zibab ar vrezhonegerien yaouank tremenet dre Ziwan evit o studioù hag evit kregiñ d'en em ziazezañ war-lerc'h :


- **Uhel e chom lodenn ar re zo aet kuit eus Breizh**, kreñvaat a rafe zoken (1/4 eus ar studierien, tost 1/3 eus ar re oberiant).
- **3 departamant kornôg Breizh** (enno 92% eus ar familhoù) a goll kalz eus liseidi gozh Diwan da vare o studioù (37% eus ar studierien) ; **ul lodenn vat anezho a zibab mont di en-dro war-lerc'h** (tremen an hanter eus an dud yaouank oberiant) met ne adkaver ket neuze ar memes live hag e dasparzh ar familhoù.
- D'al Liger-Atlantel ez a liseidi zo evit o studioù (marteze peogwir emañ o familh o chom eno evit ul lodenn anezho) met ral eo e chomfent eno evit labourat war-lerc'h.
- An departamant ma oa an nebeutañ a familhoù eo an Il-ha-Gwilen ; 29% eus ar standilhon a ya di evit ober studioù avat. Ha pa zigreskfe pouez an departamant pa erru al liseidi gozh war marc'had al labour, chom a ra an eil departamant a-rampo gant ar Mor-Bihan. **An departamant nemetañ o c'hounit brezhonegerien e fin ar gont ez eo an Il-ha-Gwilen neuze.**

Lec'h bevañ al liseidi gozh e-kerzh o red buhez

Etre 2005 ha 2011 o doa tremenet liseidi ar standilhon o bachelouriezh. Er c'houlennaoueg kaset dezho e oa un daolenn evit ma skrivfent e peseurt kumun e oant bet o chom a vloaz da vloaz abaoe an amzer-se. Alese e c'haller lakaat war wel elfennoù a denn da red buhez liseidi gozh Diwan etre ar bloavezh 1^{añ} goude o bachelouriezh ("bak+1") hag ar 7^{vet} bloavezh ("bak+7").

Ret eo notenniñ e tigresk ment ar standilhon a feur ma tremen ar bloavezhioù (eus en tu all da 200 den evit bak+1 da 64 evit bak+6) ; da-heul e vrasa tamm-ha-tamm ar marz faziañ a-hed an amzer. Gant 27 den ennañ eo re vihan isstandilhon bak+7 evit tennañ titouroù kadarn diwarnañ, se zo kaoz n'eo ket bet miret er grafikoù da-heul.

Ha bevañ a ra al liseidi en ur gumun disheñvel diouzh hini o zud ?



Goude ar vachelouriezh e vev muiañ-niver al liseidi en ul lec'h disheñvel diouzh kumun annez o zud. Brasaat a ra c'hoazh o lodenn etre bak+1 ha bak+3 a-raok digreskiñ un tamm adalek bak+4. E memes kumun hag o zud emañ o chom war-dro 9% eus ar studierien tremenet el lise Diwan ent keitat war an amzer studiet.


Studiadenn Ebssa Breizh war red buhez ar yaouankiz²² a ziskouez e vev e ti o zud an 2/3 eus ar re 18 vloaz (kevatal da bak+1), al lodenn-se a zigresk ingal goude betek tro-dro d'1/4 da 24 bloaz (kevatal da bak+7). Displegañ a ra ivez ez a kuit buanoc'h ar re a ra studioù, tra ma vev aliesoc'h e ti o zud ar re yaouank oberiant o deus echuet o studioù, ne vern o oad. Da 23 bloaz, tost 1/4 eus ar studierien a vev e ti o zud e-skoaz war-dro 1/3 eus ar re yaouank oberiant.

²² M. Ramonet, 2010. De l'adolescence à la vie adulte : le cheminement des jeunes bretons de 15 à 29 ans. Octant Analyse, Ebssa Breizh, Roazhon. 1, 5 p.

Ar grafik a-us a ziskouez ez eus un diforc'h emzalc'h e-keñver ti ar gerent : **kalz nebeutoc'h e vev liseidi Diwan e kumun o zud eget ar peurrest eus ar boblañs**, ne vern an oad. Tuet int da guitaat o zud abretoc'h eget ar re all enta : diouzhtu goude ar vachelouriezh. Gwelet a reer ivez er grafik e tigresk lodenn ar re yaouank a vev e kumun o zud etre bak+1 ha bak+3, d'ar mare ma vez ar braz anezho oc'h ober studioù²³. Lod anezho a zistro da gumun annez o zud war-lerc'h, a-feur m'en em gavont war marc'had al labour, da lavaret eo da-geñver ur bazenn etre a-raok en em staliañ da vat (evel ma c'hoarvez gant ar re yaouank oberiant all).

Pa oant e klas Termen e Karaez, ne oa nemet 3 eus 216 lisead ar standilhon a veve e ti o zud, diabarzhidi e oa eus an holl re all, alies abaoe ar skolaj ; kement-se a laka da soñjal e vefe emrenoc'h liseidi Diwan eget al liseidi all hag e vefent tuet nebeutoc'h da vevañ e ti o zud goude ar vachelouriezh. A-hend-all, studiaden an Ebssa a zispleg e chom pelloc'h e ti o zud ar studierien pa vez ur pol skolveurel nepell, ar pezh n'eo ket gwir evit an darn-vrasañ eus standilhon Diwan (tremen an 2/3 eus al liseidi Diwan a veve e ti o zud da vak+1 a oa en ur gumun skolveurel pe en endro stok ouzh unan anezho).

Hag e Breizh e chomont ?



*E Breizh e chom ar pep brasañ eus al liseidi gozh evit o studioù betek bak+3 (ouzhpenn 80 % anezho). Er-maez eus ar vro emañ 10% eus liseidi Diwan da vak+1 ha bak+2, tremen a ra ar feur da 19% da vak+3. **Evit o Master eo e kuita o bro kalz eus al liseidi Diwan** (ouzhpenn 40% da vak+4 ha da vak+5). Diskouez a ra ar grafik int tuet da zistreiñ da Vreizh goude.*

Rann al liseidi a vev er vro a dremen eus 90% da vak+1 da 56% da vak+5 a-raok pignat en-dro goude : **ha pa vefe kalz eus liseidi gozh Diwan o kuitaat Breizh, ul lodenn vat anezho a zistro goude ur mare.** Evit kadarnaat ar soñj-se, e-touez tud yaouank oberiant ar standilhon e 2012, 1/3 eus ar re a vev e Breizh zo bet o vevañ er-maez eus Breizh d'ur mare bennak er bloavezhioù a-raok.


²³ Standilhon Diwan zo ennañ tud o deus bet ur vachelouriezh uhel, tuet int da genderc'hel gant o studioù en deskadurezh hollek, evel er peurrest eus ar boblañs.

Ouzhpenn 5% eus liseidi Diwan zo o chom en estrenvro kerkent hag an 2 vloavezh kentañ goude ar vachelouriezh, ur feur un tamm uheloc'h dija eget feur hollad studieren Frañs. En Aotreegezh 3 (bak+3) hag e Master 1 (bak+4) ez eer ar muiañ d'an estrenvro evit e studioù, dre-vras. D'ar mare-se e tizh an dregantad ur barr e-touez ar re yaouank tremenet dre Ziwan ivez (22% da vak+4). Digreskiñ a ra da vak+5 hep tremen morse dindan an 10%. Tuet e vefe da greskiñ un tamm c'hoazh a-feur m'en em gav al liseidi gozh war marc'had al labour (bak+6, bak+7) met re vihan e teu ar standilhon da vezañ er rummadoù-se evit bezañ sur eus an dra-se.

Da vak+5 emañ en he uhelañ lodenn al liseidi gozh o chom e Bro-C'hall gant 1/3 eus ar rummad oad, d'ur mare ma echuer e studioù ha ma kroger gant e vuhez vicherel. Tuet e vefe al lodenn-se da zigreskiñ goude.

E munudoù ar respontoù e weler eo tremenet 28% eus liseidi Diwan dre an estrenvro e-kerzh o red buhez, met n'eus nemet 11% eus ar standilhon a oa en estrenvro e 2012 : mont a reont d'an estrenvro evit prantadoù berr kentoc'h (6 miz pe bloaz peurliesañ), da-geñver o studioù hep mar. Eus an tu all, 21% eus liseidi Diwan zo bet o chom e Bro-C'hall e-kerzh o red buhez met 16% eus ar standilhon a oa eno e 2012 : prantadoù hiroc'h a dremenont e Bro-C'hall evit ober studioù pe evit labourat (2 vloaz pe muioc'h evit tost an 2/3 anezho).

Emdroadur an dasparzh etre an departamantoù



Pouez 3 departamant ar c'hornôg zo dreist e-touez familhoù al liseidi (**90% eus al liseidi o doa o familh eno**) ; digreskiñ a ra kalz kerkent ha bak+1 (55%) betek sellet ouzh ur bihanniver da vak+3 (48%), kreskiñ a ra en-dro er bloavezhioù goude hep adkavout al live orin avat. Klotañ a ra pouez al Liger-Atlantel da bak+1 gant e bouez e-touez familhoù al liseidi, digreskiñ a ra goude-se. An departamant ennañ an nebeutañ a familhoù e oa an **Il-ha-Gwilen** (2%), kemer a ra ur pouez bras da vak+1 betek bezañ **an departamant pennañ m'emañ liseidi gozh Diwan o chom da vak+3** (47%, tost an hanter eus ar vrezhonegerien yaouank chomet e Breizh) ; ha pa zigreskfe e bouez un tamm war-lerc'h e chom d'ul live kalz uheloc'h eget na oa er penn kentañ.

Kadarnaet ha resisaet eo ar pezh a oa bet stadet er pennad a-raok diwar-benn emdroadur dasparzh al liseidi etre an departamantoù.

Penn-ar-Bed

Penn-ar-Bed eo an departamant nemetañ e Breizh-Izel a vir ur pouez uhelik e-touez ar re yaouank goude ar vachelouriezh (levezon **kêr skol-veur Brest**). Daoust da se, koll a ra un tamm mat anezho. 61% eus ar vrezhonegerien yaouank o doa o familh en departamant-mañ pa oant el lise ; da vak+3 ne chom eno nemet 38% eus al liseidi gozh. Goude-se eo tuet an departamant da adtapout brezhonegerien yaouank en-dro hag adpignat a ra betek 51% met **10 poent diforc'h** a chom koulskoude.

Aodoù-an-Arvor hag ar Mor-Bihan

En 2 zepartamant-mañ n'eo ket ken bras pouez ar skolioù-meur. **Koll a reont ar pep brasañ eus o brezhonegerien yaouank goude al lise.** Diwezhatoc'h eo techet pouez an departamantoù-se da adkreskiñ e-touez ar vrezhonegerien yaouank, a-feur m'en em gavont war marc'had al labour, met, evel e Penn-ar-Bed, ne dizher ket en-dro al live orin.

Liger-Atlantel

An departamant **a stumm an nebeutañ a vrezhonegerien** eo. Ur pouez brazik en deus betek bak+3 koulskoude a-drugarez d'ar studierien en em gav eno, alies peogwir emañ o familh aze ivez. Da c'houde avat e hañval ar pep brasañ eus ar yezherien mont kuit evit kenderc'hel gant o studioù e Roazhon pe evit mont da vevañ er-maez eus Breizh.


Il-ha-Gwilen

An Il-ha-Gwilen eo an departamant a zesach ar muiañ a vrezhonegerien yaouank hag a c'hounez yezherien evel-se. N'emañ o chom en departamant-se nemet 2% eus familhoù skolidi gozh Diwan an enklask ha da Bak+1 e veve ennañ 37% eus ar studierien (35 poent diforc'h). **Da vak+3 e kaver ennañ tost an hanter eus ar vrezhonegerien yaouank** (46%). Goude e tigrisk e bouez tamm-ha-tamm met da vak+6 e vev c'hoazh en Il-ha-Gwilen ouzhpenn 1/4 eus al liseidi gozh.

Dre-vras ez a kuit ar vrezhonegerien yaouank war-zu Il-ha-Gwilen e-pad o studioù. D'ar mare-se ez eo uhel a-walc'h an niver anezho el Liger-Atlantel ivez. Diwar-goust ar Mor-Bihan hag Aodoù-an-Arvor e c'hoarvez an anadenn-se dreist-holl : Penn-ar-Bed a zeu a-benn da virout un dregantad brazik eus al liseidi gozh a-drugarez da skol-veur Brest. Da c'houde fin ar studioù e vefe un tuadur da zistreiñ war-zu an departamantoù orin, dreist-holl war-zu Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan. Techet e vefe ar vrezhonegerien da guitaat al Liger-Atlantel ; n'eo ket niverus ar re a zistro pe a ya da Aodoù-an-Arvor. E-tro **1/4 eus ar re yaouank a hañval en em staliañ en Il-ha-Gwilen, anezhañ an departamant nemetañ a c'hounez yezherien yaouank.**



Emdroadur an dasparzh el lec'hioù alc'hwez



Ur bihanniver eus al liseidi a oa o familh en unan eus 3 c'hêr skol-veur pennañ Breizh (14 lisead diwar 216, 6%). Etre an $\frac{3}{4}$ hag an $\frac{2}{3}$ eus liseidi gozh Diwan a vev enno etre bak+1 ha bak+3. Etre bak+4 ha bak+6 e chom bras pouez ar c'hêrioù-se (ouzhpenn $\frac{1}{3}$) ha pa ne vefe ket ar muiañ-niver eus al liseidi o chom enno ken (d'ar mare-se e vev tost $\frac{1}{4}$ anezho e kêrioù all e Breizh, ha 40% er-maez eus Breizh).

Roazhon ha Brest eo ar c'hêrioù a vez dibabet ar muiañ : war-dro $\frac{1}{3}$ eus al liseidi a ya da Roazhon etre bak+1 ha bak+3 ha kemend-all da Vrest. Etre bak+4 ha bak+6 ez eus en-dro da 18% eus al liseidi e pep hini eus an 2 gumun-se.

Bihan eo pouez Naoned e dasparzh al liseidi gozh ha tuet eo da vezañ bihanoc'h-bihanañ e-kerzh red o buhez. Mont a reont di evit o studioù kentoc'h, alies peogwir emañ o familh o chom eno (evit an hanter anezho), ha ne vefent ket troet da chom eno war-lerc'h, diouzh a weler gant ar standilhon.

Ken bras eo pouez Roazhon hag hini Brest, dre-vras, e dasparzh al liseidi goude o bachelouriezh nemet e kresk un tamm lodenn Roazhon etre bak+1 ha bak+3. Gant 61% eus o familhoù o chom e Penn-ar-Bed e c'hortozfed ez afe da Vrest an darn vrasañ eus liseidi gozh Diwan a zibab chom en ur gêr vras. Koulskoude, da vare o studioù, int desachet gant Roazhon muioc'h eget poblañs hollek studieren Breizh (gw. p. 11). Ha p'en em gavont war marc'had al labour, n'int ket ken niverus o chom e kêrioù bras Breizh, met Roazhon ne goll ket pouez e-keñver Brest evit kelo-se.

Tu zo neuze da resisaat abegoù tuadurioù dasparzh an dud yaouank tremenet dre Ziwan e-kerzh an amzer :

- Etre bak+1 ha bak+3, ar braz eus liseidi gozh Diwan a ra studioù uhel, chom a reont e kêrioù skol-veur Breizh da gentañ ha desachet int un tamm muioc'h gant Roazhon eget gant Brest.
- Adalek bak+4 en em gavont war marc'had al labour muioc'h-mui. Darn eus ar re deuet da Roazhon ha da Vrest evit o studioù a chom eno evit labourat met n'int ket ar muiañ-niver ken : niverusoc'h eo ar re a chom er-maez eus Breizh neuze (evit echuiñ o studioù pe evit labourat), ar re all a ya da gumunioù etre pe bihan e kornôg Breizh (lec'hioù ma c'haller kavout fred hag ul lojeiz marc'had-mat, kentoc'h).

Da belec'h ez a ar vrezhonegerien yaouank e fin ar gont ?

Talvoudus e vefe resisaat an tuadurioù war ur prantad hiroc'h met setu penaos e c'hallfed brastresañ doare fiñval ar vrezhonegerien bet tremenet dre lise Diwan :

- E kornôg Breizh e krog ar pep brasañ eus liseidi Diwan da zeskiñ brezhoneg, diouzh rouedad ar skolioù Diwan, diazezet er c'hornioù pobletañ alies. A-boan an hanter a chom eno evit o studioù ha neuze ez eont da Vrest peurliesañ. A-feur ma echuont gant o studioù (Master) ha m'en em gavont war marc'had al labour, e chomont kentoc'h e lec'hioù ma c'haller kavout fred hag ul lojeiz marc'had-mat : Brest a vir ur rann eus ar yezherien yaouank tra ma kaver muioc'h a liseidi e kêrioù bihan pe etre eget a-raok. **N'eo ket dilezet departamantoù kornôg Breizh gant ar vrezhonegerien yaouank, enta, met ne vir ket e kollont un darn vat eus ar re a oa bet stummet enno e fin ar gont.**
- Nebeut a skolidi a vez stummet gant Diwan e 2 zepartamant reter Breizh. Kalz a bouez a gemeront avat pa zeu yezherien niverus bet stummet e lec'h all d'ober studioù e Roazhon (dreist-holl) hag e Naoned (nebeutoc'h). A-feur ma kuitaont ar skolioù-meur evit marc'had al labour, ul lodenn vat eus ar yezherien-se en em ziazez e **Roazhon** (Naoned a hañval bezañ dilezet) : ar gêr-se eo **a c'hounez brezhonegerien bet stummet e lec'h all** e-kerzh ar prantad studiet.
- Diavaez Breizh a zesach brezhonegerien yaouank da vare o studioù, dreist-holl pa vezont e Master (tremen 40% eus ar re bak+4 ha bak+5), ha pa grogont gant o buhez vicherel (29% eus ar re oberiant).



Diawelad war an niver a liseidi gozh o chom e Roazhon ha Brest


Diwar dielfennañ disoc'hoù an enklask e teu war c'horre ar roadennoù stadegel da-heul : 1/3 eus liseidi gozh Diwan a ya da **Roazhon** evit o studioù, chom a reont enno betek bak+3 ; etre bak+4 ha bak+6 ez eus c'hoazh 18% anezho o chom eno. Danvez a vank deomp c'hoazh evit priziañ kadarn petra a zeuont da vezañ adalek bak+7 : hañvalout a ra ar feur bezañ etre 10 hag 20% da vak+7.

Heñvel-tre eo ar roadennoù stadegel a denn da Vrest : 1/3 eus liseidi gozh Diwan a chom enni etre bak+1 ha bak+3 ; etre bak+4 ha bak+6 ez eus c'hoazh 18% eus ar remziad orin o chom eno. Adalek bak+7 e hañval ar feur chom mui pe vui d'al live-se.

Ingal e kresk an niver a vrezhonegerien yaouank a zeu er-maez eus al lise gant o bachelouriezh. 19 e oant er rummad kentañ e 1997, 46 e 2005, 89 e 2012, chañsoù zo e vefe tremenet bevonn ar 100 bachelour gant Diwan a-benn 2015 hag an 200 a-raok 2030, dreist-holl ma tigor un eil lise.

Talvoudus eo klask muzuliañ petra a dalvezo ar c'hresk-se evit an niver a vrezhonegerien yaouank a zeuio da chom en 2 gêr a zedenn anezho da gentañ. Evit ar jedadennoù da-heul hon eus lakaet ar roadennoù stadegel da c'hoari gant an niver bloaziek a vachelourien Diwan etre 1997 ha 2023 : etre 1997 ha 2012 ez eo ar sifroù stadet gant Diwan hon eus implijet evel diazez, etre 2013 ha 2023 hon eus kontet e vefe ur c'hresk keitat a 8% en niver a vachelourien bep bloaz.

Diawelad war an niver a liseidi gozh eus Diwan o chom e Roazhon




Lennadenn : tost da 70 lisead kozh eus Diwan a oa e Roazhon etre bak+1 ha bak+3 e 2011, tost da 30 e oant etre bak+4 ha bak+6. Diaesoc'h eo priziañ pegen bras eo lodenn ar re zo en tu all da vak+7 met brasjediñ a reer e c'halle bezañ un 50 bennak anezho e 2011.

An niver a vrezhonegerien yaouank o vevañ e **Roazhon** goude bezañ bet o bachelouriezh e Diwan a zefe **daougementiñ a-raok fin an dekvloaziad ha tric'hementiñ e-kreiz ar bloavezhioù 2020**. Danvez zo e Roazhon da vezañ enni tremen 400 eus liseidi gozh Diwan a-benn 10 vloaz. Ouzh ar re-se e vefe ret ouzhpennañ ar vrezhonegerien stummet gant an hentadoù publik ha prevez katolik, a-hend-all, evit merzout pegen fonnus e kresk an niver a vrezhonegerien yaouank e kêr-benn ar rannvro.

Dre ma loc'her eus ar memes diazez jediñ evit **Brest** hag e verzer eno tuadurioù heñvel, ez eus chañsoù bras e emdrofe an niver a vrezhonegerien yaouank eno en un doare heñvel ouzh hini Roazhon.

Diawelad war an niver a liseidi gozh eus Diwan o chom e Brest



Un tamm mat eus brezhonegerien yaouank Penn-ar-Bed a vo kreizennet e kêr Brest er bloavezhioù da zont.

Brest ha Roazhon eo an 2 gêr a vod ar muiañ a vrezhonegerien yaouank etre 18 ha 30 vloaz, an 2 gêr ma kresk ar muiañ an niver a vrezhonegerien yaouank hag an 2 gêr ma kresko ar muiañ an niver a vrezhonegerien yaouank er bloavezhioù da zont. Un darvoud bras ha nevez eo en istor ar yezh pa'z eus bet sellet ouzh an 2 gêr-se e-pad pell evel kêrioù alc'hwez ar gallekaat evit ar vro.

Derc'hel soñj

Red buhez liseidi gozh Diwan a denn kalz da hini an dud yaouank all tapet ganto ur vachelouriezh hollek : mont a reont da vevañ er c'hêrioù bras evit ober studioù skol-veur hag eno e chom darn anezho goude p'en em gavont war marc'had al labour. Dibarderioù dedennus a zeu war wel avat.

Fiñval a reont muioc'h eget ar re all : kalz abretoc'h ez eont kuit eus ti o zud, stankoc'h ez eont da Vro-C'hall pe d'an estrenvro eget ar Vretoned all, re Penn-ar-Bed a ya aesoc'h da Roazhon d'ober studioù eget ar studierien all genidik eus an departamant-se.

Evit brastresañ lusk fiñval liseidi gozh Diwan : un doare lanv a laka an darn vrasañ anezho da guitaat kumun bevañ o zud (e kornôg Breizh peurliesañ) da vare o studioù **evit mont da gêrioù skol-veur evit kalz anezho : Brest, Roazhon, Naoned** eo al lec'hioù a zibabont, **nemet ez afent er-maez eus Breizh**. Da eil, p'en em gavont war marc'had al labour, ez eus un doare tre : darn eus ar re a oa aet kuit a zistro da gumunioù bihan pe etre kornôg Breizh, darn all a chom e kêrioù bras Breizh (Brest ha Roazhon da gentañ) pe er-maez eus Breizh.

Cheñchamantoù zo neuze e dasparzh ar yezherien yaouank-se. E kornôg Breizh e vez stummet ar braz anezho (90%), diouzh rouedad ar skolioù Diwan ; goude mare tremen an deskadurezh uhel, ec'h adkav an dachenn-se ur pouez dreist hag a zo un tamm mat izeloc'h eget he fouez orin avat (dindan 60%). **Roazhon ha Brest eo an 2 dachenn a c'hounez brezhonegerien e fin ar gont** : nebeut-tre eus al liseidi o deus desket brezhoneg enno met mirout a reont ul lodenn vras eus ar vrezhonegerien yaouank pa erruont war marc'had al labour, goude bezañ bet ar c'humunioù pennañ da vare o studioù. Eus an tu all **kalz eus al liseidi gozh a guita Breizh** evit en em stummañ hag evit kregiñ gant o buhez vicherel (tremen 1/4).

Ar gevredigezh vrezhonek a emdro hag a cheñch gant red an amzer, evel Breizh hag ar gevredigezh dre-vas. An enklask "Etude de l'histoire familiale" graet gant an Ebssa e 1999²⁴ a ziskoueze e oa an 3/4 eus ar vrezhonegerien en tu all da 50 vloaz, e vevent e 3 departamant ar c'hornôg evit 93% anezho (e kumunioù war ar maez kentoc'h) hag e labourent (pe o doa labourer) da gentañ evel labourerien-douar (31%) artizaned - kenwerzherien (14%) ha micherourien (14%).

An enklask-mañ war liseidi gozh Diwan a ro un alberz eus poltred ar vrezhonegerien yaouank hag a zo disheñvel-mik : emaint o chom dreist-holl **er c'hêrioù bras** (Roazhon ha Brest) **pe e poloù implij bihanoc'h e kornôg Breizh**, ul lodenn vras anezho a ya kuit eus Breizh. Goude studioù a denn aliesoc'h d'ar yezhoù ha da skiantoù an natur eget er boblañs hollek ez eont un tamm muioc'h war-zu **micherioù intelektual pe etre** eget ar re yaouank all tremenet dre an deskadurezh uhel. Brezhonegerien yaouank a gaver o labourat un tammig e pep

²⁴ Isabelle LE BOËTTÉ, 2003. Langue bretonne et autres langues : pratique et transmission. Octant, Ebssa Breizh, Roazhon, 92, 18-22.

lec'h nemet niverusoc'h int war micherioù e bed ar c'helenn, ar buheziñ pe c'hoazh an arzoù ; kalz anezho a zibab stagañ gant ur red-micher mezegel pe lezvezegel ivez.

